

D'an 22 a viz Meurzh

- E 384, e roma, **santez Lea**, patrikianez Roma bet meulet gant sant Jerom evit he feiz hag he c'haritez.

- War-dro 362, en Anatolia, merzherenti **sant Bazil Ankara**, beleg.

Dre santelezh e vuhez ha nerzh e gomzoù e tiframme bemdez diouzh fazi an Ariaded kristenion bet lorbet ganto. Lezet e peoc'h da vare an impalaer Konstañs e voe harzet da vare Juluan ar Feizdian-zavour ha diskroc'hennet bev.

- E Breizh, er ^{V^{vet}} kantved, **santez Darerc'ha pe Darerca**, rouanez ha penitiourez.

Ganet eo e Breizh-Veur, nepell eus Glasc'ho (Glasgow), merc'h Calpurnius ha santez Koñsez, homañ c'hoar (pe nizez) sant Varzhin. Bez' e vefe Darerc'ha neuze c'hoar sant Padrig, abostol Iwerzhon, c'hoar santez Tigrid pe Tirid a zimezas gant ar roue Grallon, c'hoar santez Lupita, santez Culmana, santez Cinnenum ha sant Sannam. Dimeziñ a reas gant Konan Meriadeg hag e c'hanas sant Mael, sant Maelgi ha sent niverus all. Goude marv he gwaz ez eas davet he breur Padrig en Iwerzhon lec'h ma echuas he buhez en ur peniti. Digant he gwaz e resevas douaroù tro-dro da Aled (St-Maloù). Paeronez enezenn Oilean-Bheil-Inse (Valentia) eo.

- E Kembre, **sant Aelouarn**.

- En Iwerzhon, er ^{V^{vet}} kantved, **sant Trian**, diskibl sant Padrig, abad.

- E hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos), e 678, **sant Failbhe**, abad, breur sant Finan abad enez Iona, e voe abad war e-lerc'h.

- E 1652, e Dinan, **ar bac'hiadez Janed a Sant-Frañsez**, leanez.

Ganet en eskobiezh Sant-Brieg ez eas d'he 25 bloaz da leanez e kouent Santez-Katell e Dinan, en eskobiezh Sant-Maloù. Goude ur vuhez santel e varvas diwar ur c'hleñved-red oc'h ober war-dro he c'hoarezed klañv.

- E 1693, e Gwened, distro da Zoue ene **ar pac'hiad Visant Huby**, tad Jezuist, unan eus tudennoù meur adsav ar feiz e Breizh er ^{XVII^{vet}} kantved. Ganet en Henbont ha marvet e Gwened lec'h ma voe sebeliet e chapel ar Jezuisted. Gant Loeiz-Eudo a Gerlivio e tiazezas ti-retred ar wazed e Gwened ma savas evito meur a levr speredel. E 1651 e tiazezas e Kemper oberenn Azeulerezh Dizehan ar Sakramant en em ledas da c'houde dre an Iliz hollvedel.

D'an 23 a viz Meurzh

- E 699, e Bro-Saoz, **sant Ethelwald**, manac'h eus Ripon.

Aet e oa da benitiour war enezenn Farn lec'h ma vevas douazek vloaz war-lerc'h sant Kutberzh abad eskob Lindisfarn.

- E 1606, **sant Turibio de Mongrovejo**, eskob Lima.

Goude bezañ bet e-doug pemp bloaz e penn Kêr-C'hrenada e Bro-Spagn e voe anvet gant ar roue eskob Lima, hag eñ lik c'hoazh. Fromet gant stad reuzeudik ar pobloù amerindian e krogas da weladenniñ e eskobiezh divent en ur glask tennañ kuit ar fallagriezh ha sevel ilizoù hag ospitalioù e kement lec'h ma tremene.

- E 1702 e Barselona e Katalonia, **sant Jozef Oriol**, beleg.

Daoust dezhañ bezañ eus un tiegezh paour-glad e c'hellas, a-drugarez da skoazell vadelezhus un nebeud beleion, kas da benn e studioù beleg ha zoken tizhout an doktorelezh war an douenoniezh. Lakaet e servij ur barrez eus Barselona e vevas er baourentez en ur c'hrignol, o rannañ e amzer etre gwaziadezh an adunaniñ ha prederiañ ar re baourañ e galon sanket er bedenn diastal ha douget gant levez e, neñv.

- E Breizh, **sant Reverzh** (Revert) penitiour e Roz-an-Arvor.

- E Breizh, e 1689. **Ar bac'hiadez Katell (Catherine) a Francheville**, Ganet en un tiegezh pinvidik en em roas da Zoue o tiazetañ oberenn *Ar Retred* evit ar merc'hed ha kumuniezh *Merc'hed ar Werc'hez Santel* e servij anezhi.

- E Bro-Iwerzhon, er ^{V^{vet}} kantved, **sant Maidog pe Momoedog**, abad Fiddown e kontelezh Kilkenny. Patrom an wenanerion.

D'ar 24 a viz Meurzh

- **Gouel sant Gabriel Arc'hael**¹, kannad an Enkorfidigezh, disklêriet gant Pius XII, d'an 12 a viz Genver 1951, Patrom ar pellgehentiñ hag ar re a labour tro-dro. D'ar profed Daniel e kasas kemenn kevrinus an dek ha tri ugent sizhuniad bloavezhioù. Da Zakaria e kemmenas e c'hanfe Elizabed ur mab. D'ar Werc'hez Vari e kemennas ganedigezh Jezuz.

- Er I^{añ} kantved, **sant Artemon**, eskob.

Ganet en un tiegezh brientinion eus Seleukia e Pisidia en Asia Vihanañ e kejas gant an Abostol sant Paol a dremene da brezeg ar C'heloù Mat er gêr-se hag o tilezel pep tra ez eas Artemon d'e heul betek Kiprenez. Pa voe karc'hariet an Abostol e voe chadennet a-gevret gantañ. Dezanvet eskob e gêr c'henidik e tiskouezas eno gred ur gwir bastor.

- War-dro 720, e Bro-Saoz, **santez Hildelit**, abadez.

Hag hi eus un tiegezh uhelidi saoz e wiskas ar ouel e Bro-C'hall en abati Chelles pe e hini Faremoutiers-en-Brie. Galvet en-dro da Vro-Saoz gant sant Erconwald eskob London e reas war-dro stummidigezh manac'hel Ethelburg c'hoar hemañ e manati Barking.

- E 1381, distro da Zoue ene **santez Katell Sveden**, manac'hez, merc'h santez Brijida.

Dimezet enep dezhi e tivizas gant asant he gwaz, kerkent ha devezh an eured, chom gwerc'hez. Goude e varv ez ambrougas he mamm en he firc'hirindedoù da Roma ha d'an Douar Santel. Goude tremenvan Brijida e Roma e tistroas da Vro-Sveden gant he relegoù betek manati Vadstena lec'h ma wiskas sae ar manac'hezed. Deuet da vezañ abadez e skrivas ur reolenn.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **santez Krestell** (Gl. Christine), nizez santez Riwanon ha keniterv sant Herve.

- E Bro-Iwerzhon, war-dro ar bloaz a c'hras 500, **sant Domhangart (Domangard) pe Donard**, abad en Iwerzhon da vare sant Padrig.

Bevañ a reas evel penitiour war ur menez a voa anvet Slieve-Donard.

¹ Savelet eo bet ar gouel-mañ en deiziataer hollvedel gant ar pab Benead XV e 1921 ha distaolet e 1969.

- E Bro-Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Caorlan (Cairlon)**, eskob Ard Macha. Dasorc'het e voe gant sant Dage (Gl. Dagée) a zeuas da vezañ e ziskibl.

- E Bro-Iwerzhon, e 505, **sant Mac Cartheann pe Makartin** (Aedh MacCairthin, Macartan, Macartin pe Maccarthen.), eskob Clochar (Clogher) urzhiet gant sant Padrig.

- E Bro-Iwerzhon, e 653, **sant Caimin**, abad iwerzhonat. Penitiour war Inis Cealtra e sachas kalz diskibled hag e rankas sevel ur manati war enez ar Seizh-Iliz. Miret e vez darnoù eus ur salmaoueg en dijet eilet dre zorn.

D'ar 25 a viz Meurzh

- **Gouel Meur Kemennidigezh an Aotrou**, nav miz a-raok Nedeleg.

En devezh-mañ, en he zi e Nazared, ar Werc'hez Vari, pennhêrez grataennoù ar C'heviun, a roas degemer da Gomz Doue en he c'halon dre he feiz e kemenn an ael, hag en engehentas en he c'horf, dre nerzh ar Spered Santel. Gouel boutin gant Ilizoù ar Reter, lidet e Roma adalek ar VII^{vet} kantved. Hervez an hengoun ez eo ivez deiz ar pec'hed kentañ ha deiz ar c'hroastagadur.

- Da zeiz kroastagadur hor Salver Jezuz Krist, ganedigezh en neñvoù **sant Dismas**, lesanvet al Laer Mat. Kroaztaget war-un-dro gant ar C'hrist e anavezaz e Salver hag e tellidas klevout eus e berzh : "*Hiziv e vi ganin er Baradoz.*" E-pad tec'hadenn an Tiegezh Santel d'an Egipt, gouez d'un hengoun, e voe laeret o arc'hant hag an azen gant riblerion hogen e teuas Dismas d'o resteurel dre ma oant tud reuzeudik war hent an harlu. Dismas a gendalc'has e vuhez laer hogen Jezuz ne ankounac'has ket en e eur diwezhañ.

- E 269, e Roma, da vare an impalaer Claudius, merzherenti **sant Kirin**. E gorf a voe taolet en Tibr ha da c'houde e voe sebeliet e bered Pontian war straed Porto.

- Er V^{vet} kantved, **sant Maodiern** (Mordiern, Modiern, Mordeyrn), beleg penitiour. Kembread, mab ar roue Edeyrn, e oa genidik eus Nantglyn lec'h ma tiazezas un iliz. Eno e c'hoarvezas pareañsoù goude e varv. Lezanvet "roue ar mor" dre m'en dije nijet a-us d'an dourioù ne ouezer ket hag-eñ e teuas da Vreizh-Vihan lec'h ma kaver Plou Maodiern (Ploudiern) war aodoù Kernev.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **santez Peronell**, gwerc'hez, c'hoar sant Goulven.

D'ar 26 a viz Meurzh

- Er bloaz a c'hras 391, en Armenia, **sant Pêr Sebast**, eskob, feizvonnour. Hag eñ mab-bihan santez Makrina, mab sant Bazil an hini kozh ha santez Emilianna, breur sant Bazil Veur, Gregor Nis ha santez Theosobia. Difenn a reas ar reizhkredenn rak an Ariaded.

- Er IV^{re} kantved, e Sirmium en Pannonia (hiziv Hungaria), merzherenti **sant Montan**, beleg, ha **santez Maksim** e wreg. Taolet int bet en Danav gant paganiz, abalamour d'o feiz.

- Er IV^{re} kantved, e Krimea, **santez Larisa (Berid) hag he c’humpagnuned**,. Bez' e oant e-touez an 308 kristen a voe dêvet en un iliz war urzh ar roue got Athanarig dre ma nac’hent azeuliñ un idolenn.

- E 809, e manati Werden e Bro-Saks, **sant Ludger**, eskob. Stummet gant Alcuin ha diskibl sant Gregor Utrecht e voe kaset gant ar roue gall Karloman da avielañ ar Saksoned e gwalarn Europa. Ur wezh eskobet e stalias e sez e Münster hag e tiazetas meur a vanati a voe kreizennoù skignañ ar feiz.

- E 952, e Bitinia, **sant Bazil Yaouank**, penitiour. O tilezel madoù ar bed ez eas da benitiour e menezioù Azia Vihanañ. Kemeret evit ur spier e voe harzet gant amaezhiaded an Impalariezh Bizantat. Aterset e diskulias avat buhez fall ar barner hag e voe dieubet. Neuze e kavas ti ur mignon e Kêrgustentin ha ne dermas ket da rebechiñ o gwallvuhez d’e gempredidi evel d’an impalaer. Pa varvas e teredas ur mor a dud d’e obidoù.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Sieg**, manac’h, diskibl sant Brieg. Savet en deus ur peniti e Lanseeg e Bro-Sant-Maloù.

- Bepred e Breizh, e1639, **an Tad Stefan ar Gerubined**, karmeziad e Roazhon. Gouzout a reas liammañ ar ouiziegezh gant birvidigezh e feiz. Mervel a reas e-doug ur mision.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **sant Sincheal**, abad. Diskibl sant Padrig e oa. Diazezañ a reas ur skol hag ur manati e Cill Aichidh a renas betek pemp kant manac’h.

- C’hoazh en Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Mocheallog**.

D’ar 27 a viz Meurzh

- E 121 en Illiria, hiziv e Slovenia, **santez Lidia ha sant Philetas**, he gwaz, hag o bugale **ar sent Masedon ha Theoprepid**, merzheriet war-un-dro gant **sant Amphiloque**, e penn ar bezenn ha **sant Chronidas**, greffier, lakaet d’ar marv en abeg d’o feiz da vare an impalaer Hadrian. Goude bezañ bet jahinet ouzh ar marc’h-koad e voent splujet en ur gaoterad eoul berv.

- E 718, distro da Zoue ene **sant Ruperzh**, eskob Salzburg, Iwerzhonad hevez lod. Tad speredel Bro-Aostria eo. Dibabet e voe da eskob Worms. Da c’houde ez eas da Vro-vBaier war c’houlen an dug Theodon. E Juvavum, gwezhall kreñvlec’h roman, e lakaas da sevel un iliz hag ur manati a renas evel abad-eskob hag a voe kreizenn skignañ ar feiz er vro. Avielañ a reas ar bobl o toujañ d’ar sevenadur henvroat.

- Er bloaz a c’hras 1100, e Belvag (Beauvais) e Bro-C’hall, merzherenti **sant Mazhev**. Aet d’ar Groaziadeg gant e eskob e voe prizoniet gant ar Sarazined. Gourc’hemennet da nac’hañ e feiz e nac’has hag e voe kondaonet d’ar marv. Dibennet e voe da Wener ar Groaz dre m’en doa goulennet ur goursez en doare da ampellat e verzherenti betek an deiz santel-mañ.

- E 1868, e kouent Itron Varia ar Repu en Angelu (Anglet) e Bro-Euskadi, **ar Gwenvidig Loeiz-Edouarzh Cestac**, beleg.

Genidik eus Baiona, e oa kure en iliz-veur pa ziazezas e 1836 ar Baradoz vras evit an emzivadezed ha diwezhatoc'h Kongregadur Merc'hed Mari. Er Werc'hez Vari e kavas bepred sklêrijenn ha skoazell evit e holl obererezhioù kement ha ma selle outañ evel servijer Mari.

- E 720, war enezenn Indr nepell diouzh Naoned, **sant Ervelen**, abad, beleg.

Ganet war-dro 645 e Noyon, e oa milour e lez ar roue frank Klotar III a zilezas evit mont da vanac'h en abati Fontenelle e-kichen Rouen. War c'houlenn sant Pasker, eskob Naoned, e teuas da ziazezañ ur gumuniezh en e eskobiezh.

- En Iwerzhon : - er ^{V^{vet}} kantved, **sant Louarn**, eskob e Breizh, marvet en Iwerzhon ;

- **sant Suairleach**, eskob Fore adalek 735 ;

- **sant Fionntán**, lesanvet *Fionntán ar Salmoù*, manac'h en Iwerzhon.

- En Iwerzhon, e 1173, **sant Giolla Mac-Liag** (Lt Gelasius), abad Derry, eskob Ard Macha.

Warlerc'hier sant Malac'hi e vije bet an eskob kentañ o resev ar pallium. Eskob didrec'hus e redas Iwerzhon eus ar penn d'egile oc'h adurzhiañ ar manatioù hag o sevel senezoù. Kensakriñ a reas sant Laorañs O'Tool arc'heskob Dulenn.

D'an 28 a viz Meurzh

- E 592, e Kavillon (Chalon-sur-Saône), distro da Zoue ene **sant Gontran**, roue Burgondia, mab bihan Klodwig I^{añ} a Vro-C'hall.

Goude ur vuhez amjeestr e tic'haouas e bec'hedoù er binijenn hag er bedenn oc'h ober donezonoù e gounid ar beorion, an ilizoù hag ar manatioù.

- E 750, ganedigezh en neñvoù **santez Gunelind**, abadez, merc'h dug Elzas, c'hoar santez Ujania, nizez santez Odila ma voe he warlerc'hiadez evel abadez Niedermunster.

- E 827, **sant Boyan pe Enravota**, merzher kentañ Bulgaria.

Hag eñ priñs Bulgaria a oa c'hoazh er baganiezh e teuas da vezañ kristen daoust da eneberezh e vreur Milomir a roas an urzh d'e zibennañ.

- E 1134, sant **Steven Harding**, abad.

Gant menec'h all ez eas eus abati Molesme da hini Citeaux e Burgondia lec'h ma voe anvet abad. Diazezañ a reas ar vreudeur lik. Degemer a reas sant Bernez gant eizh keneil hag e tiazezas daouzek manati o reiñ dezho ar Garta a Garitez evit mirout an unaniezh etrezo.

- Er ^{VI^{vet}} kantved, **sant Evemer** (Gl. Eumère), eskob Naoned e 527.

- En Iwerzhon, e 530, **sant Karneg** (Iw. Cearnach), eskob.

Roet en dije e anv da barrez Sant-Karneg nepell diouzh Dinan.

- War-dro 915, **sant Tuatal (pe Tutilo)**, manac'h en abati Sant-Gall en Helvetia.

Evel e vignon sant Nokter e oa ur arzour anezhañ, speredek-meurbet, ampart gant e zaouarn, helavar gant e gomz, barzh donezonet kaer, sonour, livour hag orfebour.

- E 1954, e Bro-Laos, merzherenti **ar gwenvidig Yann-Vadezour Malo**, beleg merzher genidik eus Kerrigon nepell diouzh Nozieg e Bro-Naoned, ezel eus ar C'himiniadennoù Diavaez.

